

- 37 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

97. PLAC'H AR MEZGUEZ

( folenn 30 )

Ar Sul kenta Guengolo deiz pardon ar forest  
a zeus komposet eur chanson da plac'h ar Mezgouez.

en deus gwerzet e hontel evid mond dar pardon  
Da prena per ag avalou da potret he hanton.

Pa erruas er pardon, hag hi da plass ar per  
erruout an tri pod iaouank enon en he c'hever.

- Dallit, emezi, potret, na setu aman per.  
Ar potret a lavare no devoa ket affer.

hag hi monet ahane nag en eur c'hrosmolad.  
-Kouskoude, emezi, potret, ar reze a voa mad.

hag hi monet ahane da plass an avalou rus  
- Ar re man dianan, potret, no heus ket da refus.

- Tavit, franceza ar morvan, tavit, na voellit ket,  
Dond a reï Gwilou ar moal eur vech c'hoas d'ho goelet.

Pa vezoz en he kaera en devezo c'houec'h godel  
Een ma e karget ar re ze e vo ed goezet ar gontel

Ar sonn man ne vo ket kannet ken a vo al pelzorn  
a neuze ni e c'hanno pa vezim doc'h an dol  
e drebi ag e heva en eur dennat on toll

~~~~~  
VVVVV

Jannton ar Charlès, 10 févr. 1851

~~~~~VV